



KANTIK SANT GWENNOLE

DISKAN :

O pastor mat, Sant Gwennole,
Klevit pedenn ho pugale ;
Diwar ho tron, er baradoz,
Skuilh' warnomp gliz ho pennoz }bis

I

Sant Gwennole a zo ganet
Eus a lignez ar rouaned ;
Fragan, e dad, eun den a feiz
A oa kenderv da roue Breiz.

II

Met, Gwennole, abred-abred,
A zisprizas madou ar bed ;
Ha, ser pedi hag aspedi,
E c'hellas mont d'eun abati.

III

Eno, mistri, eus ar gouesta
Ha Sant Budog er penn kenta,
Gant plijadur ha gant evez
A gelehnas o breur nevez.

IV

Evel manac'h e voe nerzus
Da heulia mat roudou Jezuz
Hag e teuas, dre an dever,
Da veza sant, e berr-amzer.

V

Divezatoc'h, Sant Gwennole
A c'houlennas dont da Gerne ;
Hag ar roue, hanvet Gralon
E resevas a-greiz Kalon.

VI

El lec'h m'ema Landevenneg,
Eul lec'h didrouz ha gwezenneg
Eun abati a voe savet...
Breman, siouaz, eo diskaret.

VII

Eno dreist-holl en deus bevet
Eno ivez en deus poaniet ;
D'ober brezel d'ar gwall dechou
Dre ar rusta piniennou.

VIII

Kousket nebeut war ar c'haled
Ha pedi kalz gant mil resped
Labourat start, yun didruet,
Setu aze urz e vuhez.

IX

Ouz t'ol ar pred p'en em gave
Gant bara heiz en em vage
Hag e skuilhe ludo varnan
Evit lakaat blaz fall ean.

X

Hiriou avat, barz an nenvou
Eo digollet eus e boaniou
Goude gouzany war an douar
Eo evurus e kreiz ar gloar.

XI

O, ni ho ped, Sant Gwennole
Mirit hor c'horf hag hon ene ;
Hon diwallit diouz ar c'hlenved
Ha, dreist peb tra, diouz ar pec'hed.

XII

Hon youlou fall, an diaoul, ar bed
A stourm ouzomp skrijus meurbed
Pijet ganeoc'h dont hep dale
Da skoazella ho pugale.

XIII

Loperekiz ho kar ato
Ha d'ho karout a gendalc'ho ;
An neb a gred ho tispriza
Eus ar barrez n'hell ket beza.

XIV

Ne fell ket d'eomp beza chas mut,
Na krenerien dirak an dud ;
Ni a zougo banniel ar feiz
Uhel ha sounn war zouar Breiz.

XV

Betek mervel ni a stourmo
Gant ho sikour ni a drec'ho
Hag eun devez en ho kichen
Ni vo eurus da virviken.

BUEZ SANT PÉREC

Patron parrez Lopérec

Ton } Patronez dous ar Folgoat
Santez Mari. Mam. Doue.

DISKAN :

Christenien a Lopérec,
Savomp oll hor moueziou
Evit meuli sant Pêrec
A-greiz hor c'halonou ;
Euz barr an envou varnomp
E par he zaoulagad :
Evel ma 'z eo hor patron.
Eo hor mignon, hon tad.

I

E bro *Keumri* (1), tad Pêrec
Gwehall a oa roue ;
Dibad a reaz tud gwezic
Da ren he vugale ;
Desket braz er skiantchou
Ha dreist-oll var ar feiz,
Pêrec en oll vertuziou
A gresc a seiz da seiz.

II

Nemed he zilvidigez
N'en deuz ken ioul er bed ;
Enor na rouantelezh
N'en toueljont nepred ;
Ha pa deuz da vervel
He dad muia caret,
E oe gwelet o lezel
He dron heb keuz ebet.

III

Divar neuze he zanzez
Zo d'ar paour, d'an Iliz ;
Sevel 'ra scoliou nevez
Evit ar yaouankiz,
Sevel a ra niveruz
Couentchou en he vro,
Hag en unan, da Jesus
Ec'h en em ro d'he dro.

IV

Abalamour d'he furnez,
Prestic eo dibabet
D'ho c'helen er zantelezh
Gant he vreuder doujet.
Peb hini var he zeuliou,
D'he dro a glasc tremen,
Rag euz an holl vertuziou
E oar ar venoijen.

V

Vit creski he garantez
E kenver Hor Zalver,
E fell d'ez-han eun dervéz
Gwelet cador sant Per ;
Mont a ra da bardona
Da vez an ebestel,
Ha gant feiz da zaoulina
Dirag an Tad santel.

VI

He galon er galv ive
Varzu 'n douar zantel
En deuz gwelet eun Doue
O c'henel, o vervel.
Na sant Pêrec oa euruz
O vont dre an hentchou
Breset gwehall gant Jésus,
Hor mestr hag hon Aotrou !

VII

Gant aon beza re vrudet
E-touez he genvroiz,
En distro ez eo deuet
Da vro an Arvoriz ;
Hag en escobti Kemper,
Cuzet en eur c'hoat don,
E vev, sioulie, pell amzer
Er peoc'h, en orezon.

VIII

Var-dro ar bloavez c'houec'h cant,
Pêrec a dremenaz
Evel ma tremen eur zant :
D'an env e kimiadaz.
E Sant-Mean eo d'alc'het,
En escobti Roazon,
Gant feiz braz, en eun archet,
Relegou hor patron.

IX

En hor parrez goulscoude,
Gras d'eur person caret,
Hon deuz eul loden ive
Euz he gorf benniget ;
Ha, bep bloaz, e vez douguet
En eur procession
Gant enor ha gant respect,
Evit deiz ar pardon.

X

Kemeromp sever, christenien,
Var an abad santel ;
Enoriou ha gwenneien
N'int nemed mogidol.
Ober he zilvidigez :
Setu labour peb den,
Hag en eur ober hennez
Vo eüruz da viken.

XI

O sant Pêrec benniget,
Roit d'eomp ho scoazell
Da stourm ouz an droug speret,
Da ren buez santel.
Hor meritou zo bihan,
Ho pedennou zo crenv,
Oh ! grit, en hon tremenvan
Ma 'z imp ganeoc'h d'an ény.

Sant Pérec, petit evidomp.

B. C.

(1) *Keumri*, en gallais *Cymru*, même prononciation : Pays de Galles.